

Klaoda Le Prat (Brest 1875 – Vern-d’Anjou 1926)
pe Guitterel Claude (Sant-Nikolaz-ar-Pelem 1843 –
Kerhen 1925)
(En eul leor bet embannet e 1902)

Ar vezenn hag ar zitrouillezenn

Fablenn

Greet mad en-deus Doue pep tra ;
‘Vid displega ‘r wirionez-ma’,
Tro ‘r bed n’eo ket red din ober,
Er zitrouillezenn he haver.

Eur houëriad piz a zoñje
Pegen teo eo ‘r frouezenn-ze,
Ivez peger moan he zaol-penn¹ ;
Hag e lavare evel-henn :
« Petra ‘zoñje ‘ta ar Hrouer
P’edo an traou-ze oh ober ?
Ar zitrouillezenn-ze, ‘dra zur,
A zo gwall lakaet gand ar Fur !...
Arsa è m’em-bije he hrouget
E bleñchenn eun dervenn galed.
Gwell e ve bet, e gwirionez :
Heveleb gwez, heveleb frouez !

Pebez gaou, Garo, ne vefes ket
Bet e kuzul Doue galvet !...
A ! neuze – o ! netra surroh –
Pep tra a vefe bet gwelloh !
Rag, perag ar frouezenn vez²
Ha n’eo ket tevh eged va bez³,
N’ema ‘leh ar zitrouillezenn
Hag houmañ e beg ar wezenn ?...

Ar zoñj-ze a nehe Garo,
A yeas dindan eur wezenn dero
En eur lavared : « Ne gousk ket
Neb en-deus kemend a spered !... »
Morgousket edo pa gouezas
War e fri, an hini⁴ a gignas,
Euz an dervenn eur frouezenn,
Me ‘fell din lared eur vezenn.
Divuna reas ‘n eur en em glemm,
Hag, o kas e zorn war e zremm,
E kav ar vezenn c’hoaz staget
Oh e varo, gand gwad glebiet.

¹ he zaol-penn : he strujenn.

² ar frouezenn vez : ar mez, ar piz-moh.

³ va bez : va biz (evid ar rim).

⁴ an hini : “pini” er skrid orin.

E fri kignet a reas d'on den
Komz e-giz all hiviziken.

« O ! o ! diwada 'ra va fri, »
Emezañ, 'vond war-zu e di,
« Petar 'vefe 'ta degouezet
Ma vije warnezañ kouezet
Eur beh pounnerroh 'ged ar mez,
Evel ma'z eo ar zitrouillez !...
N'eo ket falvezet da Zoue,
Hag abeg en-doa evid-se !...
Gao neuze, oh Hen meuli
E tegouezas beteg e di.

Daoust ne gaver ket aliez
Euz an dud-se en on touez ?...
Ya, Doue a oar mad petra
A zo evidom ar gwella ;
M'en-deus greet netra heb evez,
Her gweled a reom sklêr bemdez.